

AN EAL HAC AR BUGUEL

164

Eun eal guen-kan a ioa soublet

He bennic gantha da zellet,

Da zellet sioul ous eur buguel

Cousket koantic en he gavel.

Ken henvel outhan her c'have

Ma lavaras : « deus ganen-me,

Deus, o va breur deus d'ar c'hloar ;

Te zo re gaër evit an douar.

Ama ne zeus evit an den

Plijadur ebet eb anken

Ar c'hoarz zoken a dro e leonv

Hac an oll ebatou e kaonv

Ama pa z'an den d'ar festou

An Enkrez zo var he zeuliou

Ha dious an noz e lam ive

Kerkent hac hen en he vele.

Hac e teuffe roud an anken

Var da dal-te ken dirouven

Da zivoc'h-te ker brao livet

Dre an daëlou a ve goenvet !

Oh nan, nan, te deui ganen-me

Aount var laëz da dy Zoue

Eno hon daou en eur guichen

N'hi vo eurus da viken.

Hac arabat e ve goëlvann ;

Nac hirvoud var da dremenvann

Arabat eo e ve guelet

Den en da dy e kaonv guisket.

Ra vezo laouen pep hini

Evel p'oas bet ho vadezi ;

D'as oad-te an deis diveza

Zo kaëroc'h eguet ar c'henta .

Er guis-ze pa en deus comzet

An eal-guen en deus dispaket

Varzu an env he ziousaskel.....

Mam gueaz!... Maro da vuguel.

134